

BEAj

O MAJESTE

AN IMPALAER HAG AN IMPALAEREZ

EN BREIZ

Moulet gand ar Govig, e Lannuon, perhenn ar Ganouenn.
Notenn : savet e oa bet ar meulgan-ze gand Pierre Jacques Derrien (1822-1865), euz Montroulez, da geñver beaj Napoleon III e Breiz, e 1852. Greet e-noa Napoleon III eur brezegenn e brezoneg e... Roazon ! N'am-eus ket adkavet e skrid.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Laaket eo bet ar skrid orin goude ar skrid-mañ.

War ton Kloareg Remengol

Trid gand laouenidigez, ha sao da benn uhel,
Stlak da zaouarn, kan joauz, va bro ger Vreiz-lzel
Douar koz an dud leal, ar zent, ar verzerien,
Douar ar Feiz, an Enor hag ar vrezelourien !

Ya, sao da dal luheduz ha kurunet a hloar,
Setu-te er reñk kenta deuz broiou an douar ;
Niz an den en-deus lakaet ar bed oll da grena
A zo, evel eur mignon, erru d'az pizita.

Deus, tosta, lestr benniget, lestr an dud kaloneg,
Deus gand on Impalaer, ar Priñs ker galloudeg,
Ambrouget gand an avel, luskellet gand ar mor,
Deus da ober da ziskenn en porz braz an Arvor.
Petra zo gand ar hleier o vralla en touriou ?
Kleved 'ran trouz an drompill ha kruz ar hanoliou
Deredit oll, tud Treger, tud Kerne, tud Leon,
Skoit, c'hwi tabourinou, setu Napoleon !.....

Kêr a Vrest, digor buan da zorojou houarn ;
D'ar Priñs galloudeg a zalh an urz en e zaouarn ;
Da Impalaer bro-Hall kerkoulz ha d'e Bried
Gra eun degemer heñvel deuz kement o-deus greet.

Deuz al listri rubanet leun a bavillonou,
Karget a dud tro-war-dro, beteg beg o gwerniou
Ar youhadennou joauz, ar hanol o tenna
A lak, evel ar gurun, an douar da grena.

Evel ar mor o pignad en-dro d'eur roh uhel
En em daol dre ar ruiou ar bobl a Vreiz-lzel ;
C'hweh-kant-mil mouez a zao krenn deuz a bevar horn kêr
En eur grial : *Ra vevo pell an Impalaer!*

Pa dao kruz ar hanoliou ha mouez skiltr ar hleier,
Ar mêr, e penn e goñseill, Prefed ar Finister
Dindan eun ark a drionoñ, 'vel n'eus gwelet biskoaz,
A reseo o Majeste en traoñ deuz ar ru vraz.

Merh ar mêt, gwisket en gwenn, gand deg kamaradez,
He-deus kerkent kinnigeg fleur d'an Impalaerez.
Pin¹, gand eur zell tener ha daou bokig charmant,
He-deveus roet dezi kroaz en diamant.
Neuze an daou zouveren, heb ober tamm diskuiz,
A zo, gand tud o falez, eet war-eeun d'an iliz.
War pazennou ar porched, evid o degemer,
E penn e oll veleien, e oa Eskob Kemper.

Goude beza kinniget dezo dour benniget,
Raktal an Aotrou 'n Eskob en-deus de² lavaret :
« Pobl Vreiz en em gav fier hag enoret hirio
O weled war he douar brasa Impalaer 'zo.

Mamm-vro an dukez Anna, ouspenn ma ro bepred
Ar gwella vartoloded, ar greñva soudarded :
A fornis c'hoaz d'an Iliz beleien a gouraj
Pere a ya da brezeg ar feiz d'an dud saovaj.

Pa lakefot³ ho fiziañs war penn or Breiziz ker
E welfot, gand plijadur, n'en-deo ket gaou ar ger
Lavaret gand eur chef braz, penaoz eur gwir Breton
N'en-deus greet war an douar birviken traizon⁴.

¹ Pin : Pehini. Fazi bet greet gand an oll skrivagnerien en amzer-ze. Gand "pere"
ivez. Meur a hini a zo er skrid-se.

² de : dezo.

³ lakefot : tregerieg. Pa lakaot.

Bremaig, en treid an aoter, e pedfom⁵ oll Doue
Da skuill e hrasou warnoh, Napoleon trede,
Da venniga heb ehan ho pried vertuzuz,
Ha da ziwall euz gwalleur ho mab karantezuz. »

Neuze an Impalaer en-deveus respontet
E oa eur bonheur⁶ dezañ beza degemeret
Dre veleien Vreiz-lzel, gand pere⁷, a galon,
E yee, da bedi Doue evid on nasion⁸.

Kerkent eo bet antonet an himn kaer⁹ *Te Deum*,
Ar muzik en-deus kanet an *Domine, Salvum*,
Hag en kichenn he Fried, e-barz en templ santel
E oa on Impalaerez daoulinet 'vel eun êl.

Raktal goude an ofis, ar hortech¹⁰ zo eet prim
D'an ti en pini¹¹ e chom ar prefed maritim¹²,

⁴ traizon : trubarderez.

⁵ pedfom : tregerieg :pedim.

⁶ bonheur : eurvad.

⁷ pere : ar memez fazi c'hoaz.

⁸ on nasion : or bro.

⁹ antonet an himn kaer : staget gand ar ganaouenn gaer

¹⁰ ar hortech : an heuliad tud.

¹¹ pini : pehini : ar memez fazi c'hoaz.

¹² prefed maritim : prefed ar mor.

E leh ma'z eo bet prizet gand on Impalaer
Lakaad doned dirazañ ar pennou braz a gêr.

An deiz war-lerh, deuz an noz, eo digoret ar bal,
En pini¹³ eo bet lezet tud ar vro d'antreal,
An Impalaerez a oa o tañsal gand ar mêt
Ha merh koant ar chef braz-mañ gand an Impalaer.

Pa oe echuet an dañs, pemp warn-ugent plah koant ¹⁴
O rei dorn d'o havalier¹⁵, paotred meurbed galant¹⁶,
A zo kerkent paseet, er zal, e-biou an tron,
En o raog ar biniou hag ar vombard o son.

Dirag an daou zouveren o-deus greet an *dañs-tro*,
Ar *bal*, ar pach-pi koulz hag ar *jabadao*;
An Impalaer a hoarze, hag an Impalaerez
He-deus straket he daouarn gand laouenidigez.

Ar bobl, evel bugale doujañsuz ha tener,

¹³ pini : ar memez fazi c'hoaz.

¹⁴ pemp warn-ugent plah koant : pemp plah koant warn-ugent.

¹⁵ d'o havalier : galleg. Ar paotr a zañs gand eur plah.

¹⁶ meurbed galant : galant-meurbed (seven-meurbed e-keñver ar merhed).

Karget euz a garantez 'vid an Impalaer ;
Koulz hag evid e bried, ne yee ket da gousked
Ken en-divije deze¹⁷ nozvez vad lavaret.

Kent ma'z euz a êr Vrest eet an Impalaer kuit
E prized d'e Vajeste rei ar groaz a verit
D'an Aotrou Keramanah, person kêr Vontroulez,
Eur pastor karantezuz ha leun a vadelez.

A-raog mond en e wetur e kav an aotrou mêt
Hag e lak en e zaouarn, evid peorien e gêr,
Evid an dud ezommeg *eunneg mil pemp kant lur*
Da zousaad de' o mizer, ha sikour o mezur¹⁸.

En eur zortial a Vrest e kavas war gezeg
Eun nombr braz a Vretoned ha mêt Lambezelleg
Pere, joauz a galon ha laouen a ene
O-deus ambrouget o Friñs, beteg êr Landerne.

En-kichenn dor ar gêr-mañ e oa en em gavet
Ouspenn pemp kant kavalier war gezeg kaer-meurbed,
Ha pere oa deredet euz pevar horn ar vro
'Vid enori o friñsed hag ambroug anezo.

¹⁷ deze : tregerieg : dezo

¹⁸ mezur : evid boueta anezo.

Er Faou, ugent plah yaouank euz kêr, diwar ar mêz
O-deus ivez kinniget fleur d'an Impalaerez,
Pehini, goude reseo deveriou braz an oll,
'Zo deut da rent ar zalud da berson Remengol.

Ar beleg venerabl-mañ, gand e brosesion,
A oa, evel ar re all, deut d'ar reünion,
El leh m'helled remerkoud, displeget en avel
Bannielou kaerra iliz a zo en Breiz-Izel.

Bremañ zo c'hwezeg kant vloaz, Grallon, ar roue koz,
Tennet gand sant Gwenole, d'an taol a hanternoz,
Demeuz ar gêr gapital, a yee da gonfonti,
A zavas an Iliz-mañ 'vid ar Werhez Vari.

Evid rei gloar d'an Aotrou ha renta testeni
Euz ar miraklou ker braz zo erruet enni,
Pevar Bab, tri gardinal hag an eskibien oll
O-deveus greet prezantchou da iliz Remengol.

Ar rouanez o-unan, euz o zron diskennet,
Dirag mamm an *oll remed* a zo bet daoulinet ;
Deuz pevar horn ar hontre ha deuz ar broiou pell
E teuer da enori Patronez Vreiz-Izel.

Mez an enor ar brasa he-deveus resevet
Ez eo beza, gand trioñf, er bloaz-mañ kurunet
Dre vikel vraz Jezuz-Krist, ar pab santel Pi nao,
Dirag ar bobl daoulinet ha beleien ar vro.

Person Iliz Remengol, gand eur vizaj seder
A zo deut da zigori dirag an Impalaer
Ar haier braz alaouret en pehini eo skrivet
Ar grasou spirituel da Remengol roet.

Kerkent an Impalaer ha goude e bried,
O kemered eur bluenn o-deus warnañ sinet ;
Prizet o-deveus ivez kemered gand respet
Teir medalenn gaer en aour euz mamm an oll-remed.

An Impalaerez devod a lavar d'ar person,
Penaos he-deveus anken ha keun en he halon
Tremen e-biou Remengol heb gelloud antreal
Da zaoulina eun nebeud en eun iliz ken ral.

Mez d'ar pastor venerabl he-deus rekomandet
Pedi eviti, evid he mab hag he fried ;
An Impalaer neuze a ro eur som en aour
Evid, en o ezommou, soulaji an dud paour.

Evel ma'z eo erruet en kêr ar Hastellin,

Eur vandenn peizantezed, koant ral ha gwisket fin ;
O-deveus bet kinniget d'an Impalaerez,
'Vid lakaad d'he mab bihannañ, dillad diwar ar mêz.

Gand kalz a gomzou tener, on Impalaerez vad
A deu d'o interoji ha d'o zrugarekaad ;
Dalhet he-deveus ivez pell braz war he barlenn
Eur hoof bihan gwarniset, greet gand kemenerien,

War-dro peder eur hanter, gwetur an Impalaer
A zo, gand e eskorchou, antreet en Kemper
Deuz a behini an oll bobl a zalhe dezañ prest
Enoriou braz hag heñvel euz a drionoñfou Brest.

Kerkent, e penn e gonsel, eo deut an Aotrou mêt
Da ginnig d'e Vajeste an alhweziou a gêr,
En eur asuri dezañ penaoz ne gavje ket
Tud sioulloh na fidelloh evid ar Vretoned.

An Aotrou 'n Eskob ivez, war dor e gatedral
En deus-hañ ezañset ha lavaret raktal :
« Priñs ha Priñsez souveren, ra veot¹⁹ benniget
Kerkoulz hag ar mab bihan hoh-eus dim-ni roet.

Evel ma'z int bet erruet en Otel ar Prefed
Hep kemered tamm diskuiz o-deveus resevet
Mêriou tri-ugent parrez, ar hoñseil jeneral,

¹⁹ veot : vloh.

Eun niver braz a chefou, ouspenn an tribunal.

Goude, ugent dimezell hag ugent peizantez
A ginnig eur banerad fleur d'an Impalaerez,
Gand traou bihan da hoari hag eun habit koant ral
Greet en giz Kerne evid ar Priñs Imperial.

Uuan aneze he-deveus greet eun diskour galleg
Eun all he-deus kaozeet en langach brezoneg ;
Kredi ran penaoz Breiziz o-deveus kalz a hoant
Da gleved an darn-vuia demeuz ar gomplimant:

« Itron, *emezi*, eur Priñs, hac eur Briñsez uhel
Oh erruoud en on hreiz, en foñs braz Breiz-Izel
A zo evidom-ni oll peizanted eun dra vreaa,
Eur faveur dreist-ordinal 'vel n'eus gwelet biskoaz.

Derhel a refom bepred ar zoñj deuz ho pizit
Hir amzer ha da viken goude ma voh eet kuit
Ar vamm, en korn an oaled gand he bugaligou
A zesko deze hoh ano, ho madelezou.

Pa vo braz ho mab bihan, prizit deski dezañ
Penaoz en foñs Breiz-Izel, pell, pell, pell braz out,
Tud kalonek o-deveus kemeret evid ger :
« *Douj hag enori Doue, karoud hoho Impalaer.* »

Euz an noz, deuz ar goulou ha war eur blasenn vraz

E komañs ar biniou da joloriad c'hoaz,
An dañsou en giz Kerne, all laouenidigez
O-deus padet, heb ehan, beteg fin an nosvez.

An deiz war-lerh, da zeg eur, Napoleon trede
'Zo adarre partiet etrezeg Kemperle ;
Pa oa peder eur o son, ar hanol o parlant
E ree dija e antre en kêr an Oriant.

Eno, evel en kêr Vrest, heb ober tamm diskuiz
Ez eo eet, gand e gortech, da barrez Sant Louis
El leh m'en-deveus prizet lavaret d'ar hure,
E yee d'en em okupi deuz eun iliz neve'.

Ar bemzeg a viz eost, pa oa kreisteiz o son
Devez gouel braz ar Werhez ha 'r joa en o halon,
Or priñsez karantezuz a zo prest erruet
E-tal cbapel burzuduz santez Anna-Wened.

Er bloaz c'hwezeg kant ugent, eur hristen katolik,
Eun den a zoujañs Doue anvet *Nikolazig*,
Dre eur sklerijenn dezañ euz an neñvou deut prim
A reas sevel eur chapel da bried sant Joakim.

En park braz ar Bosenno daou beizant kunduet
Dre eur houlaouen-brillant euz an oabl diskennet

A gavas eun imaj koz deuz mamm ar Werhez ker
Pehini a chomas pell-braz gand yeot evid aoter.

Ar paour-kêz Nikolazig a zo bet interes
Er plas memez ma'z eo bet an imaj koz kavet,
Mez Doue 'roas dezañ ar bonheur, kent mervel
Da weled e batronez savet dezi eur chapel.

Abaoe 'ma Nikolazig o kousked en e vez
Tudjentil vraz, priñsezed ha kalz a rouanez
O-deus kaset prezantchou da dempl Santez Anna
Pehini a vez bizitet gand deg mil den bep bloa'.

Pa'z eo deuz dor ar porched tostaet an Impalaer
Eskob Gwenet a zo deut evid hen degemer
Harpet waar breh daou veleg dre ma'z eo oadet braz,
Pronoñs a ra koulskoude gand eur vouez uhel c'hoaz :

« Gand eur bonheur ar brasa, devee e ouel ken kaer
E lakaan va respejou e treid va Impalaer ;
Ra brizo gand an Otrou selaou eun eskob koz
Ha skuilla warnoh ho-taou e hrasou, e vennoz.»

A-raog m'en-doa echuet an eskob e gomzou
An Impalaerez, touchet, e laoskas he daelou ;
Peultrin an Impalaer a weled o tridal

Dirag bleo wuenn ar pastor, pa respontas raktal :

« Touchet on, Aotrou 'n Eskob, hag a-viken e vin
Deuz ar geriou ken lenner hoh-eus lavaret din ;
Peurvuia d'or zujedi e rankom an egzempl
Mez, a-wechou e tleom mond var o lerh d'an templ.

Evel-se, evid heulia kustum ar vro vreton
E falvet²⁰ din, deiz va gouel, pellaad dimeuz va zron
Ha dond amañ da houlenn euz Doue a dle or barn
Bonheur ar bobl en-deveus roet din da houarn.»

P'o-deus greet o fedennou dirag santez Anna
An Impalaer hag e wreg zo deut da asista
D'ar zakrifis adorabl a zo bet selebret
War an aoter zakr savet evid ar belerined.

Goude bea lezet arhant evid ar paour
O-deus d'an Aotrou 'n Eskob roet eur halir aour ;
An Impalaer vertuzus en-deus roed dija
Da Zantez Anna Wened eur banniel ar gaerra.

Tri-ugent mil medalenn zo goude benniget
Evid derhel da viken en touez ar Vretoned
Soñj euz ar pelerinaj greet gand o Majeste
Impalaerez Eujeni, Napoleon trede.

²⁰ falvet : falvezit

Goude templ Santez Anna o-deveus bizitet
En-kreiz eun niver a bobl ar gêr euz a Wened.
En eur dremen Lomine da vond da Zant-Brieg
O-deveus roet mil lur 'vid an dud ezommeg.

Evel ma'z int erruet, evid he bizita,
Er gêr gaer a zoug ano Napoleon kenta,
An Impalaer a gemenn ar person drezañ
Starta mad a ra e zorn, hag e lavar dezañ :

« Pevar-hant mil liur arhant a roan deoh hirie
Evid ma hellfet amañ kaoud eun iliz neve' ;
C'hoant am-eus e ve dioustu al labour komañset
Rag a-benn daou viz amañ me deuio d'he gweled.»

Loudeac ha Moncontour en-deveus paseet ;
Erfin, en kêr Sant-Brieg ez eo bet antreet,
E-pad ma oa ar hleier koulz hag ar hanoliou
Ganto mouez skiltr ha ken kreñv oh anoñs ar helou.

Biskoaz n'eus gwelet kement a laouenidigez
'Vel deuz an Impalaer hac an Impalaerez
Pa'z int deut, en eur gemer Bretoned da eskort
En departamant ken kaer euz kosteziou an nord.

Moncontour, Ifiniak, Gwengamp ha Lannuon,
Pempoull ha Kastell-Aodren, Pontreo ha Lanvolon
O-deus beteg Sant Brieg kaset o fomperien
Evid renta muioh-mui enor d'o zouveren.

Dindan ar porched ken kaer euz a gatedral kêr
Ez eo bet degemeret ar priñs on Impalaer
Gand tost da bemp kant beleg hag ar vikeled vraz,
O tougen, abaoe nebeud, kañv d'o eskob, siwaz !

Ahane eo diskennet en otel ar Prefed
Pehini en-deveus dezañ ar chefou prezantet ;
Goude eo prizet gantañ diskenn war ar peron
Evid gweled o tremen an deputasion.

Kerkent pobl ar hampagnou, evel bagou ar mor,
A 'n em daolas er porz braz, en eur forsi an nor,
Hag o krial a-bouez-penn : *Ra vevo pell amzer*
Or Priñses karet, he mab, hag an Impalaer!

Deuz an noz, evel en Brest, eur bal braz a zo bet,
En pehini, gand merh ar mêt ar Priñs en-deus dañset
Gwall diêz e lavared pebez rejouisañs
A oa o heul ar Briñsez hag Impalaer ar Frañs.

Deuz a Vrest beteg Roazon, pep parrez ha pep kêr

A zav eun ark a drionoñ evid an Impalaer ;
Deuz a Vrest betek Roazon, o peger braz burzud !
N'ez eus en daou du d'an hent nemed mogerioù tud !!!

An deiz var-lerh, da zeg eur, a-raog m'int partiet,
O-deus, evid ar beorien, deg mil lur c'hoaz roet
Hag o tremen dre Lambal, Dinan ha Sant Malo
Int erruet en Roazon kenta kêr euz or bro.

N'ez eus ket war an douar nag enorioù na stad
Ker braz evel ar re greet gand Roazon, ar gêr vad,
Nann, biskoaz an dud nopl nag an diked gwechall
N'o-deus bet eun degemer par d'Impalaer Bro-Hall.

« Deut, eme an Aotrou 'n Eskob, antreit e iliz
El leh ma rentas gwechall Sant Erwan ar justis ;
Deut, Priñsez, c'hwi ken heñvel euz an dukez Anna,
Da gleved or pedennou ha da weled or joa.»

Goude eur fest vraz roet gand oll dud vraz ar vro
Ha beza deze lavaret : kenavo an distro.
Goude kement a drionoñ, a ouelioù en pep giz
On daou zouveren a zo retornet da Bariz.

Pierre DERRIEN

Skrid orin

BEACH

O MAJESTE

AN IMPALAER HAG AN IMPALAERES

EN BREIZ

War ton Kloarek Remengol

Trid gand laouenidigez, ha sao da ben huel,
Sltak da zaouarn, kan joaus, va bro ger Breiz-lzel
Douar gos an dud leal, ar zænt, ar verzerrien,
Douar ar Feiz, an Henor hac ar brezellourien!

Ya, sao da dal luc'hedus ha kurunet a c'hloar,
Cetu te er renk kenta deus broyou an douar,
Niz an den en deus laket arbed oll da grena
A zo, evel eur mignon, erru d'as bizita.

Deus, tosta lestr binniget, lestr an dud kalonek,
Deus gant hon Impalaer, ar Prinç ker galloudek,
Ambrouget gant an avel, luskellet gant ar mor,
Deus da ober da zisken en pors bras an Arvor.

Petra zo gant ar c'hleyer o vralla en tourriou ?
Klevet 'ran trous an drompil ha kros ar c'hanolliou

Diredit oll tud Treger, tud Kerne, tud Leon,
Skoit, c'hui tabourinou, cetu Napoleon !.....
Kær a Vrest, digor buan da zorojou ouarn;
D'ar Prinç galloudek a zalc'h an urs en e zaouarn;
Da Impalaer bro c'hal kerkouls ha d'he Bried
Gra eun digemer henvel deus kement o deus gred.

Deus all listri rubanet leun a bavillonou,
Karget a dud tro var dro, beteg beg o guerniou
Ar youadenou joaus, ar c'hanol o tenna
A lak, evel ar c'hurun, an douar da grena.

Evel ar mor o pignat en dro d'eur roc'h huel
En eum doll dre ar ruyou ar bolbl a Vreiz-lzel;
C'hoec'h kant mil voues a zaokren deus a bevar c'horn ker
En eur grial: *Ra vevo pell an Impalaer!*

Pa dao kroz ar c'hanolliou ha moues skiltr ar c'hleyer,
Ar mær, e penn e gonsel, Prefet ar Finistær
Dindan eun ark a driomf, vel n'eus guelel biskoas,
A receo o Majeste eu traon deus ar ru vras.

Merc'h ar mær, guisket en guen, gant deg kamarades,
E deus kerkent kinnidek fleur d'an Impaleres
Pin, gant eur zel tener ha daou bokik charmant,
E devez roed dezi groas en diamant.

Neuze an daou souveren, eb ober tam diskuis,
A zo, gand tud o fales,ed var eon d'an ilis.

Var pazennou ar porchet, evit o digemer,
E penn e oll veleyen, e voa Eskop Kemper.

Goude bea kinniget dezo dour binniget,
Ractal an Otrou n'Eskop en deus de lavaret :
« Pobl Breiz en eum gav fier hac henoret hirio
O velet var e zouar brassa Impaler zo.

Mam-bro an dukes Anna, ouспен ma ro bepred
Ar guella morlolodet ar grenva soudarddet :
A tournis c'hoas d'an llis beleyen a gouraj
Pere a ya da brezeg ar feiz d'an dud sauvaj.

Pa lakefot o fizianç var pen or breizis ker
E velfot, gand plijadur, n'en de ket gaou ar ger
Lavaret gand eur chef bras, penos eur guir breton
N'en deus gred var an douar birviken trahison.

Bremaïc, en treid an oter, e pedfomp oll Doue
Da skuil e c'hraçou varnoc'h, Napoleon trede,
Da vinniga eb hean o pried vertuzus,
Ha da zioual eus goalheur o mab karantezuz. »

Neuze an Impalaer en deveus respontet
E voa eur bonheur dean bea digemeret
Dre veleyen Breiz-lzel, gant pere, a galon,

E ye, da bedi Doue evit no nation.

Kerkent e bet antonnet an hymn kaer *Te Deum*,
Ar musik en deus kanet an *Domine, Salvum*,
Hac en kichen e Fried, ebars en templ santel
E voa on Impaleres daoulinet vel eud æl.

Ractal goude an ofiç, ar c'hortech zo êd prim
D'an ty en pini e chom ar prefet maritim,
Elec'h ma ze bet prizet gant on Impalaer
Lakat donet dirazan ar pennou bras a gær.

An de varlerc'h, deus an nos, e digoret ar bal,
En pini e bet lezet tud ar vro d'antreal,
An Impaleres a voa o tançal ganl ar mær
Ha merc'h koant ar chef bras man gant an Impalaer.

Pa voe echuet an danç, pemp varn'ugent plac'h koant
O rei dorn d'ho c'havalier, potret meurbed galant,
A zo kerkent passeet, er zal, a biou an tron,
En o rog ar biniou hac ar vombard o son.

Dirag an daou souveren o deus gred an *danç tro*,
Ar *bal*, ar passe-pie kouls hac ar *jabadao*;
An Impaler a c'hoarze, hac an Impaleres
E deus straket o daouarn gant laouenidigez.

Ar bobl, evel bugale doujançus ha tener,
Karguet eus a garante vit an Impalaër;
Kouls hac evite bried ne yê ket da gousket
Ken en divije deze nosves vad lavaret.

Quent ma ze eus a gær Bresl ed an Impaler kuit
E prizet d'he Vajesle rei ar groas a verit
D'an Otrou Keramanac'h, person kær Montroules,
Eur pastor karantezus ha leun a vadeles.

Arog mont en e voiturr e c'hav an otrou mær
Hac e lak en e zaouarn, evit peorrien e gær,
Evit an dud ezomek *eunneg milpemp kant liur*
Da zouçat de o mizer, ha sikour o mezur.

En eur zortial a Vrest e kavas var gezek
Eun nombr bras a Vretonet ha mær Lambezellek
Pere, joaus a galon ha laouen a ene
O deus ambrouget o Frinç, betek ær Landerne.

En kichen dor ar gær man e voa e n'eum gavet
Ouspen pemp kant kavalier var gezek kaër .meurbed,
Ha pere voa diredet eus pevar c'horn ar vro
Vit henori o frincet hac ambroug anezo.

Er Faou, ugent plac'h yaouank eus kær, divar ar mes
O deus ive kinniget fleur d'an Impaleres,
Pehini, goude receo deveriou bras an oll,
Zo deut da rent ar zalud da berson Remengol.

Ar beleg venerabl man, gant e brocession,
A voa, evel ar re all, deut d'ar reunion,
El lec'h m'ellet remerkout, displeget'en avel
Banielou kaera ilis a zo en Breiz-Izel.

Breman zo c'hozek kant vla, Grallon, ar roue kos,
Tennet gand sant Guenole, d'an tol a anter nos,
Demeus a gær gapital, a ye da gonfonti,
A zavas an Ilis man vit ar Verc'hes Vari.

Evit rei gloar d'an Otrou ha renta testeni
Eus ar miraklou ker bras zo erruet enni,
Pevar Bab, tri gardinal hac an eskibien oll
O devezus gred presantchou d'a ilis Remengol.

Ar rouane o unan, eus ho zron diskennet,
Dirag mam an *oll remed* a 'zo bet daoulinet;
Deus pevar c'horn ar c'hontre ha deus ar vroyou pell
E teuer da henori Paronès Breiz-Izel.

Mæs an benor ar brasa e devezus recevet

Eze bea, gant triomf, er bloa man kurunet
Dre vikel vras Jesus-Christ, ar pab santel Pi nao,
Dirag ar bobl daoulinet ha beleyen ar vro.

Person llis Remengol, gant eur visach seder
A zo deul da zigori dirag an Impaler
Ar c'hayer bras alaouret en pini e skrivet
Ar graçou spirituel da Remengol roet.

Kerkent an Impalaer ha goude e bried,
O kemeret eur bluen o deus varnan sinet;
Prizet o deveus ive kemeret gant respet
Teir vedalen gaër en aour eus mam an oll-remed.

An Impaleres devot a lavar d'ar person,
Penos e deveus anken ha keun en e c'halon
Tremen abiou Remengol eb ellout antreal
Da zaoulina eun nebeut en eun llis ken ral.

Mæs d'ar pastor venerabl e deus rekommandet
Pedi eviti, evit e mab hag e fried;
An Impalaer neuze a ro eur som en aour
Evit, en o ezomou, soulaji an dud paour.

Evel ma ze erruet en kær ar C'hastellin,
Eur vanden paysantezet, koant ral ha guiske fin;

O devez bet kinniget d'an Impalaeres,
Vit lakat d'e mab bihanan, dillat diwar ar mæs.

Gant kalz a gomzou tener, hon Impaleres vad
A deu d'o interroji ha d'o drugarekat;
Dalc'het e devez ive pell bras var e barlen
Eur c'hoeff bihan goernisset, gred gand kemenerrien,

Vardro peder heur anter, voitur an Impaler
A zo, gant e escorchou, antreet en Kemper
Deus a bini an oll bobl a zalc'he dean prest
Henoriou bras hac envel eus a driomfou Brest.

Kerkent, e pen e gonsel, e deut an Otrou mæ
Da ginnig d'e Vajeste an alc'houebou a gær,
En eur assuri dean penos ne gavje ket
Tud siouloc'h na fidelloc'h evit ar Vretonet.

An Otrou n'Escop ive, var dor e gathedral
En deus-an ezanset ha lavaret ractal :
« Prinç ha Princes souveren ra veot binniget
« Kerkouls hag ar mab bihan o c'heus demp-ni roet.

Evel ma zint bet errue en Hotel ar Prefet
Eb kemeret tam diskuis o devez recevet
Mæriou tri-ugent parres, ar c'honsel general,

Eun niver bras a cheffou, ouspen an tribunal.

Goude, ugent dimezel hac ugent paysantes
A ginnig eur bannerat fleur d'an Impaleres,
Gand traou bihan da c'hoari hac eun habit koant ral
Gred en gis Kerne evid ar Prinç Imperial.

Uuan ane e devus gred eun diskour gallek
Eun all e deus kozeet en langach brezonek;
Kredi ran penos Breizis o deveus kals a c'hoant
Da glevet an darn vuia demeus ar gomlimant:

« Itron, *emezi*, eur Prinç, hac eur Brinces huel
Oc'h erryout en om c'hreis, en fonç bras Breiz-Izel
A zo evidomp ni oll paysantet eun dra vras,
Eur faveur dreisl ordinal vel n'eus guelet biskoas.

Derc'hel a refomp bepret ar zonz deus o pizit
Hir amzer ha da viken goude ma voc'h ed kuit
Ar vam, en korn an oalel gant e bugaligou
A zesko d'e oc'b hano ho madelezou.

Pa vo bras o mab bihan, prizit deski dean
Penos en fonç Breiz-Izel, pell, pell, pell bras out
Tud kalonek o deveus kemeret evit ger:
Douj hac henori'Doue, karoulto Impaler. »

Eus an nos, deus ar goulou ha var eur blacen vras
E kommanç ar biniou da joloriat c'hoas,
An dançou en gis Kerne, all laouenidiges
O deus padet, eb hean, beleg fin an nosves.

An de varlerc'h, da zeg heur, Napoleon trede
Zo adarre partiet etrezek Kemperle;
Pa voa peder heur o son, ar c'hanol o parlant
Ere dija e antre en kær an Orient.

Eno, evel en kær Brest, eb ober tam diskuis
Ez e ed, gant e gortech, da barres Sant Louis
El lec'h m'en deveus priset !avaret d'ar c'hure,
E ye d'en eum occupi deus eun llis neve.

Ar bemzek a vis eost, pa voa kreis de o son
Deves gouel bras ar verhes ha'r joa en o c'halon,
Or brinces karantezus a zo prest erruet
E tal cbapel burzudus santes Anna-Venet.

Er bloa c'huezek kant ugent, eur c'hristen katolik,
Eun den a zoujanç Doue hanvet *Nicolazik*,
Dre eur sklerijen dean eus an envou deut prim
A ras sevel eur chapel da bried sant Joachim.

En park bras ar Bocenno daou baysant kunduet
Dre eur c'houlouen-brillanl eus an noabr diskennet
A gavas eun imaj kos deus mam ar Verc'hes ker

Pini a chommas pel! bras gand yeod evit oter.

Ar paour kes Nicolaizk a zo bet interrerr
Er plaç memeus ma zê bet an imaj kos kavet,
Mæs Doue 'roas dean ar bonheur, kent mervel
Da velet e batrones savet dei eur chapel.

Aboue m'a Nicolazik o kouskar en e ve
Tud jentil vras, princezet ha kalz a rouane
O deus kasset presantchou da dempl dantes Anna
Pini a ve bizitet gant deg mil den bep bloa.

Pa ze deus dor ar pochet tostet an Impaler
Eskop Guenet a zo deut evit en digemer
Arpet var brec'h daou veleg dre ma ze oaget bras,
Prononç a ra gouskoude gant eur voues huel c'hoas :

« Gant eur bonheur ar brassa, devez e vouel ken kaer
E lakan va respejou e treid va Impalaer;
Ra brizo gant an Otrou selaou eun eeskop kos
Ha skuilla varnoc'h o taou; e c'hraçou, e vennos.»

Arog m'an doa echuet an eskpp e gomzou
An Impaleres touchet e loskas e daëlou;
Pultrin an Impalaer a velet o tridal
Dirag blêo guen ar pastor, pa respontas ractal :

« Touc'bel on, Otrou n'Eskop, hac a viken e vin
Deus ar gueriou ken lener oc'h eus lavaret din;
Peur vuia d'or zujedi e rankomp an exempl
Mes, avichou e kleomp mont var o lerc'h d'an templ.

Evelse, evit heulia kustum ar vro breton
E falvet di, de va gouel, pellat demeus va zron
Ha dont aman da c'houlen eus Doue a gle or barn
Bonheur ar bobl en deveus roed din da c'houarn.»

P'o deus gred o fedennou dirag santes Anna
An Impaler hac e vreg zo deut da assista
D'ar z krifis adorabl a zo bet celebret
Yar an oter sacr savet evit ar belerinet.

Goude bea lezet arc'hant evit ar paour
O deus d'an Otrou-n'Eskop roed eur c'halir aour;
An Impaler vertuzus en deus roed dija
Da Zantes Anna Venet eur baniel ar gaera.

~ ' 1

Tri ugent mil medalen zo goude binniget
Evit derc'hel da viken en toues ar Vretonet
Sonj eus ar pelerinach grêd gand o Majeste
Impaleres Eugeni, Napoleon trede.

Goude templ Santes Anna o devez bizitet
En kreis eun niver a bobl ar gær eus a Voenet.
En eur dremen Lokmine da vont da Sant-Briek
O devez roed mil liur vit an dud ezomek.

Evel ma zint erruet, evit e bizita,
Er gær gaer a zoug hano ~Napoleon kenta,
An Impaler a gemen ar person drazan
Starda mad a ra e zorn, hac e lavar dean:

« Pevar c'hant mil liur arc'bant a roan d'hec'h hirie
Evit ma c'helfet aman kaout eun llis neve;
C'hoant a meus e ve dious-tu al labour kommancet
Rac a ben daou vis aman me deuio d'e guelelet.»

Loudeac ha Moncontour en devez passeet;
Erfin, en kær Sant-Briek e ze bet antreet,
Epad ma voa ar. c'hleyer kouls hac ar c'hanolliou
Ganto moues skiltr ha ken kre oc'h annonç ar c'helou.

Biskoas n'eus guelelet kement a laouenidigez
Vel deus an Impalaer hac an Impaleres
Pa zint deut, en eur gemer bretonet da escort
En departamant ken kaer eus kosteziou an nord.

Moncontour, Iffiniak, Guengamp ha Lanhuon,

Pempoul ha Kaslel-Audren, Pontreo ha Lanvnon
O deus beteg Sant Briek gasset a fomperrien
Evit renta mui-oc'h-mui henor d'o souveren.

Dindan ar porchet ken kaer eus a gathedral kær
E ze bet digemeret ar prinç hon Impalaer
Gant tost da bemp kant beleg hac ar vikelet vras,
O tougen, aboue nebeut, kaon d'o eskop siouas!

Ac'hane e diskennet en hotel ar Prefet
Pini en deveus dean ar cheffou presantet;
Goude e prizet gahtan disken var ar perron
Evid guelet o tremen an deputation.

Kerkent pobl ar c'hampagnou, evel bagou ar mor,
An eum dolas er pors bras, en eur forci an nor,
Ac o krial a boues pen : *Ra vevo pell amzer*
Or Brinces karet, e mab, hac an Impalaer!

Deus an nos, evel en Brest, eur bal bras a zo bet,
En pini, gant merc'h ar mæer ar Prinç en deus dancet
Goal diez e lavaret pebeus rejouissanç
A voa o c'heuil ar Brinces hac anl Impaler ar Franç.

Deus a Vrest beteg Roazon, pep parres ba pep kær
A zav eun ark a driomf evit an Implæer;

Deus a Vrest beteg Roazon, o peger bras burzud!
N'en deus en daou du d'an hent nemert mogerious tud!!!

An de varlerc'h, da zeg heur, arog m'int partiet
O deus, evit ar beorrien, deg mil liur c'hoas roet
Hac o tremed dre Lambal, Dinan ha Sant Malo
Int erruet en Roazon kenta kær eus or bro.

N'en deus ket var an douar nac henoriou na stad
Ker bras evel arre gred gant Roazon, ar gær vad,
Nan, biskoas an dud nopla nac an duket guechal
N'o deus bet eun digemer par d'Impaler bro C'hal.

« Deut, eme an Otrou n'Eskop, antreit en Ilis
Ellec'h ma rentas guechal Sant Ervoan ar justis;
Deut, Princes, c'hui ken henvel eus an dukes Anna,
Da glevet or pedennou ha da velet or joa.»

Goude eur fest bras roed gand oll dud vras ar vro
Ha bea d'e lavaret : kenavo an distro
Goude kement a driomf, a voueliou en pep gis
Hon daou souevren a zo retornet da Baris.

Pierre DERRIEN

Moulet gant ar Goffik, e Lanhuon, perc'hen ar Ganouen.